

GWERZ

BREZELOURIEN BREIZ-IZEL

ER BLOAZ 1870.

Potius mori quam fœdari.

Kentoc'h mervel vit n'em vastari!..

War dou : *Paotred Plouillo.*

Goersed Breiz-Izel, tud kalet,
Poent braz eo mont d'ann emgann
Pe e welfomp hon bro flastret,
Laket enn gwad hag enn tan!...
Vel hon tadou, bezomp nerzuz,
Evel-t he torrump pennou ;
Hag eunu deiz e vezimp trec'huz
Ha brudet enn holl vroiou!..

Bezomp kalonek, mignoned,
Dispont dirag ar maro!...
Doue a gennerzo bepred
Neb ac'hanomb heñ pedo!...
Biskoaz ar Vreiz n'eo bet trec'het
Ha trec'het na vo biken;
Tud ann Arvor na c'houllont ket
Koll ann han a gristen!...

Kaer ho pezo, tud kounaret,
Kaout eur c'hoant vraz d'hon diskar,
Gwad a zo enn hon gwazied
Hag a zo eur gwad dispar;
Araog ma vezimp diskaret
E vezo tomm d'ho kroc'hen:
Enn dro-man e viot gwintet,
Diwallit euz ho kilpen!...

Pa sko paotr Breiz gand he benn baz
Piou a rai d'ezhan souza?
Pa vo gant-han eur zabren vraz
Hag eur fuzuil d'ho laza...
E chomo kent war ann dachen,
Koll a rafe mil buez,
Eged lezel didamm ho penn;
Vel-d-hoc'h e vo didruez!...

Mar taol he bao war ho chupen
Marvad e viot gwasket...
Na glet ken c'houez ar zouben
E kourn ho tan azezet!
Pa vo he viz war ar bluen
He lagad lemm ho kwelo;
Kerkend ha ma losko he denn
War ar c'hlazen ho ledou!...

Naontekvet a here, 1870.

Kend eget gwelet ann dud koz,
Ar vugalez, ho mammou,
Lazet, gwallet e kreiz ann noz,
Gand ho kounar, diaoulou;
Kent eget gwelet enn hon touez
Ann drasterien, al laëron,
Ni skoio put e pep kostez
A reudo a greiz kalon!...

Kend eget gwelet dismantret
Hon ilizou, hon c'hroaziou,
Ken eget gwelet disprizet
Doue ha feiz hon tadou,
A lommou e roimp hon gwad
Beteg al lomm diveza!...
Rak biskoaz breiziad a wenn vad
N'en deuz lezet he vac'ha!...

Kend eget gwelet dismantret
Ar vro a geromp muia
Kend eget gwelet holl zuillet...
Hon eost, danvez hon bara;
Kend eget gwelet hon tour kleuz,
Diskaret gand ho tarzou,
Ni a gemero pep seurt reuz
Evit terri ho pennou!...

E kreiz ar gann, tud kalonek,
Goulennomp zikour Doue;
Bezomp holl stard vel ar garrek,
Da vad e trec'hfomp neuze...
Hag ann enebour a redo
Evel eul laer da guza.
Ha ni d'hon bro a zistroio
Gand enor da ziskuiza!...

Koz ha iaouank a lavarou,
Pa zeui ar peoc'h a neve,
O welet ac'hanomp distro,
Hon dillad gwad ha labe;
« Setu aze ar baotred vad!...
» Setu zalverien hon bro! »
Ha daëlou drant enn daoulagad
Peb unan hon Pinnigo!!!...

I.-M. AR IANN.

